

## Kan ar Bobl e Banaleg

Pemp den yaouank zo tremenet war leurenn festival Kan ar Bob Banaleg :

Jakez, Katell, Loeiz, Morgana ha Neven.

Pep hini anezho zo tremenet e-unan ha pep hini d'e dro war al leurenn.

Daou anezhe o deus sonet akordeoñs, tri anezhe o deus kanet. Kanet pe sonet o deus pemp ton en holl, daou diwar *Barzhaz Breizh*, daou all diwar dastumadenn Polig Montjarret, hag unan savet gant ar strollad Gwerz.

Met n'eus ket bet daou don da-heul tennet diwar an hevelep oberenn.

Ha gouest e vefec'h da adkavout e peseurt urzh int tremenet hag ar pezh o deus sonet pe kanet ?



1. Da gentañ ez eus bet klevet unan eus an tonioù bet dastumet gant Polig Montjarret, ha ton ar strollad Gwerz zo bet klevet da ziwezhañ.
2. Un ton akordeoñs zo bet c'hoariet etre daou don kanet, ha div ganaouenn etre an ton akordeoñs kentañ hag an hini diwezhañ.
3. An tonioù diwar levr Polig Montjarret n'int ket bet sonet ouzh an akordeoñs.
4. An trede hini war al leurenn a oa Katell.
5. Unan eus tonioù Polig Montjarret zo bet kanet gant Jakez, ha d'e heul en deus sonet Neven akordeoñs.
6. Morgana n'he deus ket kanet ton ar strollad Gwerz

1. Jakez en deus kanet un ton diwar Polig Montjarret.
2. Neven en deus sonet un ton diwar *Barzhaz Breizh*.
3. Katell he deus kanet un ton diwar Polig Montjarret.
4. Morgana he deus kanet un ton diwar *Barzhaz Breizh*.
5. Loeiz en deus sonet un ton gant Gwerz ouzh an akordeoñs.



leurenn<sup>o</sup>(où) scène(s)  
dastumadenn<sup>o</sup>(où) anthologie(s), recueil(s)  
da-heul à suivre, à la suite  
urzh(ioù) ordre(s)

## an dro-lavar

Ha lennet mat ho peus pennad ar rubrikenn Sikour, pajenn 6 ?

Setu un dro-lavar diwar-benn ar boued a vo dav deoc'h adkavout.

Évit-se e rankit lakaat al lizherennoù en o flas mat er gael amañ dindan, e pep kolonenn.


Tâchez de retrouver un proverbe lié au thème de la rubrique Sikour (voir page 6) concernant la nourriture en remplaçant les lettres au bon endroit dans chaque colonne.

E	E	G		D				A			C	A	A		
L	O	K	E	H	I	D'	D'	E		V	H	A	Z	S	
P	S	P	O	R	N	N	I	A	R	R	C'	L	H	Z	H
P	E	P		H	I	N	I	E			V	L	A	Z	
L	O	G	O	D		D'		A	R		C'	H	A	Z	H
E	S	K	E	R	N		D'		A	R		C	H	A	S

Skrivit an dro-lavar amañ dindan :

Pep hini e vlaz, logod d'ar c'hazh, eskern d'ar chas.

## Kempenn an Daol Grenn



Ur pred bras a vo aozet e Kamelod a-benn nebeut, ha goulennet en deus ar roue Arzhur ma vo staliet 10 kib, gwerennoù bras arem, war an Daol Grenn. Evit mirout ouzh spered ar varc'heien e c'houlenn ma vint lakaet war 5 linenn, 4 gwerenn war bep hini anezho.

Ha posupl eo ? Penaos 'ta ?

Afin de préparer un repas à Camelot, le Roi Arthur demande que l'on dispose 10 coupes sur la Table Ronde, en 5 lignes de 4 coupes. Comment y arriver ?